

98

CURUNAMANT

ANN ITRON VARIA-GUIR-SICOUR, E GOUENGAMP.

« Canoump joaüs curunamant
» Imach Mari en kaer Gouengamp. »

Crouadurez predestinet
Dreïst d'an oll groaguez ha merc'het,
Dreïst d'an oll sent ha senteset
Dreïst ar puran serafinet.

An tan dimeus ho carante
O terc'hel da gresquin bemde
A rei an disparti fete
Entre ho corf hac oh c'hine.

An arc'hel Gab abeurs Doue
A zisquen seder eus an ênv
A lar da Vari ar c'helo
Eus an de hac heur e maro.

Sevet, Mari, e me Jesus.
D'he Vam Goerc'hes caranteus,
Tremenet e ar gouân calet,
Deut da bales an Dreindet.

Enon e po eur gurunen
Ornet a daouzec stereden,
An heaul evit guiscamant,
Al loar vo ho kouernamant.

An Ebestel a bresegue
An Aviel en peb contre
A so prest ha prompt douguet
Da dy ar Vam muian caret.

Neuse c'hoas d'ar memes istant,
E c'happarais flam ha contant,
Bisach Jesus d'he Vam santel :
« Deut ma Mam d'ar gloar eternal. »

Dre ar garante ar puran
E gouita Mari ar bed mân
M'e do caëran curunen
A obteno nicun biquen.

Jesus a ordren d'e ælez
Conduin direc e c'hine
Dimeus a droat Mene Sion
Betec an tu deo d'e dron.

Neuse e c'houlle an ælez
O laret an eil d'eguile
Piou'ta e ar feumelen man
Da gad en ênv ar plaç quantan.

A sav splant divoar an douar
Caër ha caër evel al loar,
Unan vel an heoul biniguet
En touez quement zo crouet ?

Mez da satan ha d'e ælez !
Gloar d'ar Voerc'hes ha d'e arme !
Serpant torret eo dit da benn,
Dre vertu sacr eur feumelen.

O burzud a rejoussanç
Pa antre an Arc'h Allianç
Ar c'henta vo goude Doue
En renq ar sent hac an ælez.

Ne voa quet achu an tri de
Mac'h ordren Jesus d'e ælez :
Et, et, eul legion timat
Gant ma Mam da ve Josafat ;

Graç dean da gad buez hir,
Evit bonheur e oll ampir
Ma rei cresquin en hon touez
Ren Doue ha ren ar Voerc'hes.

Enor d'an outro mair Goengamp
En deus laret publicamant :
Vije torret e isili
Arauc noaz'bet d'imach Mari.

Mes mez sur d'ar brotestantet
Ha cas d'o doctrin milliguet
Pa dreusont ar Vretonery
O troug coms eus hon Mam Mari.

O Mam Jesus hon Mam santel
Nin o meulo bete mervel,
Pa vefomp en hon agoni
E lerfomp : Jesus ha Mari.

Pedomp Jesus, pedomp Mari
D'ober d'imp oll perseverin
Er justic hac er santelez
Bete ar fin eus hon buez.

Ma effomp un de da repos
Dre c'hraç Doue d'ar Barados,
Dre verit Jesus hon Salver
Ha dre sicour hon Mam dener.

PLACID **Mari GUILLERMIC**,

Chaloni ha Person en Bear.



Propriété.